

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ Radio Kreiz Breizh


SKLAER

Sklaer

Un anv-gwan an hini eo,
deuet diwar al latin clarus

« An dra-se zo sklaer »,
un dra anat eo

Sklaereded pe sklaerder



http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudenoù_krouet_gant_Malo_Ar_Menn

Sklêrijenn oa lesanv ur plac'h en doa anavezet
Herri a oa Lucienne he anv gwir

Sklêrijenniñ pe sklêrijennañ

Sklêrijennadeg,
kinkladurioù Nedeleg b'ar ruoù da skouer

« Disklêriañ ur gudenn », diluziañ ur gudenn

« Disklêriet eo bet », diskuliañ un den

« Gwelloc'h eo peoc'h

gant dour-stivell

evit Meurlarjez

gant brezel »



Sklaeraat, lugerniñ pe
lakaat da vout sklaeroc'h

« Krog eo an deiz da
sklaeraat », just a-raok ma
savfe an heol

« Sklaeraat a ra ar chistr »,
dont a ra ar chistr da vezañ
sklaeroc'h-sklaerañ

Sklaeradenn, e-barzh an
oabl pa vez gwelet an heol
goude ur pilad dour da
skouer

Sklaeradur,
labour sklaeraat an traoù

Da vont pelloc'h

E-barzh ar ganaouenn
An daou gamerad fidel :

« An amzer a oa ken brav
hag al loar a oa sklaer,
Aet e oamp en ur ganañ
betek penn al leurgêr »,

Cofinancé par
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne / Avec le Fonds européens
de développement régional